



CANTIC

*Var buez Sant MILLION, pehini
en deus eur chapel gaer en dreo
demeus a Loguivy-Plougras, en
dalc'h Lannion, canton Plouaret,
en escopti Sant-Briec.*

ME ho ped oll, assistanter;
Bezit attantif da glêvet
Buez caer Sant-Million:
Clêvet-hi gant devotion.

Trizec cant bloas so tremenet
Aboe ma voa ar Sant er bed;
E imach, dre eur miracl bras,
En Breis-izel en em gvas.

En dreo demeus a Loguivy;
A Sant-Briec eo escopti,
En deus eur chapel gaer savet,
Gant cals a dud eo bisitet.

En Saragosse, ebar en Spagn;
En Gascogn hac en Allemagn,
Ezeo ar Sant-man henoret,
Ivel ganeomp-ni Bretonet.

Braaul, escop (A) en eus scrivet
 Buez ar Sant-man voar. e hed ;

E santelez, e viraclou, .

Hac e bersecutionou.

E guentà micher bars er bed²

A voe beza messaer denvet, .

Hac e oll divertissamant.

A voa son gant un instrument. (B)

Un deiz pa voa gant e zenved, .

E voe gant Doue inspiret

Enpad e gousq d'o dilezel, .

Nonobstant ma voa dê fidel.

Ar Sant o dilezas ractal, .

Evit quemeret eur stad all, .

Hervez ma voa bet inspiret

Gant Doue, pa voe difunt.

An nep a glasq chanch a vuer.

A die goulen graçou Doue, .

Evit non pas beva tromplet

Goude-se gant an drouc speret.

Da gaout Sant-Felix hermit.

E has, balamour d'e verit, .

Evit disqui gant ar Sant-se, .

Penos e serviche Doue.

Prest d'ar goude en em rentas

(A) Saragoss,

(B) Eur Fleit,

000009

En un desert retiret bras,
Evit commanç e binigen,
Ha servicha Doue hep quen.

Er spas eus a zaou-uguent-vloas
Ebars en desert e chomas,
Hep beza gant den bisitet;
Mas gant Doue voa consolet.

Didim, escop, avertisset
Eus e vertuziou rar meurbet,
En quemennas da vont den cad,
Ha gant joa en recevas mad.

Didim Million a viras,
Ha belec en er gonsacras:
Ar chaloniet goude se
En eure tresorier deza.

Sant-Million a gommanças
E garg gant eua diligeanc vras;
O repren ar re na rent quet
An offiç vel ma voa dleet.

Ar veleyen a goncevas
Ous ar Sant-mâ cassoni vras;
Abalamour ma voant privet
Eus ar pès na c'honecent quet.

Dont a rejont incontinant
Da bersecuti oll ar Sant;
Den decriâ, den accusi

Non nudi deus Ollivus

Dan escop, dre ho c'hassoni.

Didim, dre e facilitate,

Re vuan a gredas aneze;

Sant - Million a zeposas,

E garg digantan a lamas.

Ar Sant na voe quet chagrinet

Evit beza bet deposet;

Mæs gant joa vras en e galon,

E souffras persecution.

Squis eus ar bed traitour ha fall,

Ar Sant a yas d'un desert all,

Elec'h adarre ma chomas

Er spac eus a zaou-uguent vloas,

Eur belec hanvet Asella,

Fur mignon dezan ar brassa,

A yê d'en goelet alies,

Abalamour de santeles.

An exempl vad eus e vuez,

E vertu, e austerite,

A rê d'an dud a bep canton

Mont da voelet Sant-Million.

D'an dud dall e ro ar goelet,

D'ar re gam e ro ar c'hersec.

Quement an devoa nec'namant

A voa soulaget gant ar Sant.

Eur belec a voa affliget

000010

Gant un apostum diremet ;
Ar Sant oc'h ober sign ar gross,
Ar yec'het dezan a roas.

Eur plac'h o vezan decedet,
Ar vuez e deus recevet.
Evel-se, dre e vertu iou,
E rê cals deus a viraclou.

Un neubeut amser quent mervel,
Ec'h anonças dezan un zel
An deiz peini e tlefoa
Dilesel buez ar bed-mâ.

Ar Sant neuse a gommanças
Da ober eur binigen vras,
D'ar sul quercouls ha d'ar pemdez,
Enpad ar bloas oll e yune.

Pedi a rê ha suplian
E Grover ebars er bed-man
Da bardoni e oll foto
Aroc ma'r rije e varo.

Tud ar bed a avertisse
Da bardin goalen Doue ;
Rac o gourdrous a rê bep tu,
Ma na gargent chench a gundu.

Eur belec hanvet Abondant,
A rê goab demeus ar Sant,
Ho lavaret voa e gosni

Éo a ré dezan ravodi.

Ar Sant dezan a respontas
 Voar guement-se gant douçder bras :
 C'hui, emezan, a eprouvo
 Da guenta eo guir va c'homso.

Ar pez an devoa annoncet
 A so bet sivoas c'hoarvezet :
 An nep a ré goab anezan
 A voe punisset da guentan.

Er fin e ene a rentas
 Entre divrec'h e vignon bras,
 Da lavaret eo, ar belec
 En assistas fidel bepret.

C'hoec'h-uguent vloas ez eo bet
 An den santel-mâ voar ar bed,
 Ho pratica ar vertuziou
 Necesser da vont dan envou.

Pa voe clévet ebars er vro,
 E voa an den-santel maro,
 Eur bobl bras a yes da voelet
 E gorf quent beza enterret.

Chetu ase un abrege
 Raportet demeus e vuez ;
 Mas quement-man nen deo netra,
 Nemert commanç e disclæria.

Évit e lacat voar paper,

E renqfen cals deus a amser,
Quent ma ouffen oll lavaret
Ar miraclo a ra bepret.

Evel ma zeo dec'h lavaret,
Miraclou bras en devez grêt,
Quen en douar quen voar an dour;
D'an nep a c'houlennno sicour.

Er mor tud so bet surprenet
Gant an tourmanchou diremet.
Ous en pedi gant confianç,
En devez bet o delivranç.

An ed so ivez preservet
Eus an amser rust ha calet,
Hac a deu da vultiplia,
Dre ar c'hraç demeus anezan.

An nep en devez procezou,
Tristidiguez pe goel gollou,
Ous en pedi a vir galon,
A recev consolation.

An ryes gant-tan attaquet,
En danger da veza losquet,
Mar suplier gant fe ar Sant,
Ez eo mouguet en un instant.

Madou pa n'em guefont collet,
Ha gant al laeron quemeret,
Lies a vech a retorner,

Dre vertu ar Sant p'en peder.

Men ho ped eta humblamant,
Da veza devot bras d'ar Sant;
Rac un tresor eo er c'hanton,
Evidomp oll Sant-Million.

En mis Eost, ar sul diveza,
Ez eus eur pardon ar c'haëra
En dreo demeus a Loguivy,
Cals a dud a deu d'en pedi.

Pedomp ni oll a vir galon,
Va breudeur quer, Sant-Million,
Hac e recevom ni dreizan,
Graçou evit en imitan.

Cals a c'hraçou spirituel,
Ha cals a vadou temporel,
Evit beva aman joais,
Ha goudè beza evurus.

F I N.

Imprimet er bloas quenta an Impalaër.

Maire, FRANÇOIS SALAUN,

Desservant, J. LE QUELLEC.